

Var ton Michel Noblet pe Chanson ar gommerezet.

En o toues , Bretonet ,  
Me gred n'en deus nicun  
Ac e fachfe ô clèvet  
Parlant eus ar butun.  
En Breiz-Izel ar voasset  
A zo oll fumerien ;  
Ar gragéz hac ar merc'het  
A zalc'h tabatieren.

Eun den hanvet HERMANDES ,  
Eus ar Spagn guinidiç ,  
O vea ed eun deves  
Beteç an Ameriq ,  
En enezen Tabago ,  
Breman zo tri c'chant vla ,  
A zizolias eno  
Plant butun da guenta.

Digas a ra d'he vam-bro  
Orzennou grèd ractal ;  
Eun uebeut eus anezo  
E ro d'har Portugal  
Eus a belec'h Yan Nicot ,  
Cannat ar roue Franç  
A zistroas gant carot  
Ha roll en abundanc.

Itronenezet ar Pales ,  
Coulis hac ar pennou bras  
Demeus hon ronanteles  
Souden a estonas ,  
Pa veijont butun laket ,  
Gant eun hast ar vrassa ,  
Da ober cranch ha moget  
Ba da lakat strébia.

Mas kerkent an dud gueziec  
A commanças c'hoari ;  
Caout a rejont mil abec  
Er butun corn ha fri .  
Muducin ar Rouanes ,  
Vit plijout d'e iron ,  
A lavaras eun deves :  
Ar butun zo poeson.

Cals eus a dud ignorant  
Var ar mæs hac en kar  
A grede voa eur presant  
Roet gant Lucifer .  
At Pab , a ben seiz sizun ,  
Coulis hac ar vèleyen  
A loskas var ar butun  
An excommunugen.

An doctoret importun  
E clasq diminui  
Custumou fall ar butun ,  
O takas da greski ;  
Rac an oll labourerrien  
A deus d'o goapat  
En eur vrassaat ar chiken  
Coulis hac ar c'horniedat.

Goude cals a jolori  
Ha meur a obaden  
E commanças c'hoant fumi  
Antreal en o fen.

Neuze oll e commandhont  
Derc'hel mélîm pe forn ;  
En o godel e toughont  
Pe eur vest pe eur c'horn.

Ebars er Franç , marteze  
E zeus meur a gilleu  
Pere c'hoas a refuse  
Kemeret eur brisen  
Mas biken eur guir breton ,  
Na greg coant , na plac'h flour  
Ne vo , a greis e galon ,  
D'har butun adversour.

Butun zo ken necesser  
Evel ma zê ar boued ;  
Meur a zen eus ar c'hartier  
A jomfe zur eb pred  
Qentoc'h evit eb butun.  
Ar brassa fumerien  
N'è ket an dud a fortun ,  
Mas , siouas ! ar beorrien.

Ar mèvier a vezz dillat  
Evit caout da eva ;  
Ar paour evit butunat  
Zo kasi meneus tra.  
Guelet a rér avichou  
Eun tam eos paganat  
O réi betec e billon  
Evit eur c'horniedat.

Remerki a rér brêman  
Ar falla mic'hiec ;  
Eur c'horu brassoc'h evitan  
O vranskell en e veg ;  
Er scol n'eus allet diskî  
Nemert e VE ha BA ,  
Mas er skiant da fumi  
E zê ar savanta.

Ne eller ket gouscoude  
Disprijout ar butun ;  
Eur c'horniedadic beinde ,  
Deus ar mintin var ynn ,  
A scanva cals ar bilou ,  
Hae a gass kuit ractal  
Ar boan dent , goel humoriou ,  
Kercouls hac an èr fall.

Ar butun zo eur mignon  
D'an den zo e unan ;  
Pried eur vreg dirêzon  
A gonsol en e boan ;  
Pa vel manch ar scubêlen  
Prest da vont var e choung  
E lak tan var e biben  
Hac'h ya en e roud.

Potret yaouanq dilicat ,  
En oad d'ober al lès  
A blij dèze butunat  
En kichen o mestres ;  
An drase zo direspet ,  
Eun amourot poli ,  
Dirac e vuia caret  
Ne glefe qet fumi.

Amzer zo bet yan zoudard  
A vije diou zizun  
O testum pèvar liard  
Evit prena butun.  
Mas an qll a vo contant  
Brêman da zervicha ,  
Pa ro ar gouarniamant  
Butun evit netra.

Sellit eus ar mortolod ,  
O font d'e vatiman  
Gant pourvision carod ,  
Illa cigarenou coant  
N'ensket douçoch'h evitan ,  
Bopret e ve laouen  
Mas diouallit dioustan  
Pa lako eur chiken.

Butun poult so d'ar merc'het  
Excellant hac util ;  
Mad e deus ar c'hoant kousket ;  
Illa da zigas barbil .  
Ober a ra tud savant ,  
Rac ouspen tri c'chant den  
O deus cavet o skiant  
En eun dabatieren.

Pa deu d'ar plac'h coz-viret  
C'hoant da vont en fortun ,  
E tenu dirac ar botret  
Eur vest leun a vutun ;  
Neuze ar c'henta ini  
A deuyo da gemer  
Eur Iribentie digant-i  
A vo e zervicher.

Deut èr ar c'his d'ar voasset  
Da gaout tabatieren ;  
Mas ive cals a verc'het  
A blij d'e ar biben .  
Eur vureden alaouret  
A stribil eus ar fri  
A zo ken caér da velet  
Ae eur c'horu o fumi.

Ar butun zo eur remed  
Da lakat distêli ;  
Purvua ve implijet  
Eus ar boan izili .  
An oll a brofit outan ,  
Ar pes so guelloc'h c'hoai ;  
Eiz cant mil den divarnan  
A chonit o bara.

Mont a ran , va mignonet ,  
Brêman da échui .  
Mar oc'h eus c'hoant da glèvet  
Piou e zê an ini  
En deus grêt ar ganouen ?  
N'è ket divar ar mæs ;  
E hano zo PÊR DERRIEN  
Eus a gær Montroules.

FIN

P. DERRIEN.

# CHANSON NEVE.

Composé gant ar Cloarec, evit disqueuz ar vantr-calon en eus santez eus a zemezi e Vestrez.  
Composé pour un lâveur pour faire que l'ouïe y laisse le plus tôt la maladie

Var ton ; Malgré toute la tendresse.

Pebes qêlon , ô , va Doue ,  
 A meus hirie recevet !  
 Va mestresic , va c'harante ,  
 A glêvan so demeset ;  
 Va mestresic , va c'harante ;  
 An ini garrien muia ,  
 Ha pa sonjân en qementse ,  
 Va c'halon a ven ranna .

Oll blijadurou an natur  
 A so ecu evidon :  
 Echu e sâr à blijadur .  
 A davee va c'halon ;  
 Echu è ar gontantamant  
 Am boa ebars er bed-mân :  
 Foëi d'an aurou ha foëi d'an arc'hant ,  
 Enep guis n'o desirâñ .

Me a garfe caout eur matier  
 A guement a ve capabl  
 Da renta va c'halon seder ,  
 Da sec'hî va daoulagad ,  
 Da rejouissa va c'halon ,  
 Da gontanti va speret ,  
 D'am lemel a affliction  
 Ha da rei din ar yec'het .

Mes quementse so incredabl ,  
 Ha ne arruo biqen ;  
 Me so ar muia miserabl  
 Eus an oll gronadurien ,  
 A meus collet en un instant  
 Ar froues eus a hemp llaves ,  
 En un gol va c'hontantamant ,  
 Va flijadur , va mestres .

Adieu eta , paros Plestin !  
 Adieu tud a goneçanç ,  
 Me a meus cavet va chagrin  
 Emesq ho rejouissanc ;  
 Me meus ho c'heullet gant douster ,  
 Me ho quita gant glac'hар ,  
 Henvel demens un dursunel  
 A ve privet eus e far .

Choui hoc'h eus grêt va flijadur ,  
 Va joa , va c'hontantamant ;  
 Choui a ra va displijadur ,  
 Va anqen , va nec'hantamant ;  
 Emesq ar ros a ambrassen  
 Ha va oll delection  
 Me a meus cavet un dresen  
 Haac a big calz va c'halon .

Mes bremàn me gred en guirion  
 Résou an dud babilla ,  
 Penos e c'heller caout poëson  
 Emesq ar sue an doussa ;  
 Ha diñdan ar fleuriou caera  
 Alies e ve coachet  
 Aspicou ar re grueula ,  
 Aëret-guiber , serpantet .

Rae se eta , me ho supli ,  
 Ia , dre ma ho carian ,  
 Na deut james da reposi  
 Elec'h ma vefet bravân ;  
 Rae ma c'hêra enep goaleur  
 Da ober dêch diblassa ,  
 E vesò tristoc'h ho malhieur  
 Ha diessoc'h da usa .

Evit test eus a guementse ,  
 Va breudeur , va c'hoareset ,  
 Choui pere am anaveset ,  
 N'oc'h eus met dont d'am quelet ,  
 Ha pa velfot ar chenchant  
 Pini a so deut ennon  
 Choui a brouvo certenamant  
 E sê touchet va c'halon .

Diaroq me a voa envel  
 Eus eur rosen florissant ;  
 Va c'halouic bepret seder ,  
 Carguet a gontantamant :  
 Ar joa pintet var va diou chot ,  
 Va daoulagad qer laouen ,  
 Ma sonjen , dre ma voan diot ,  
 N'am bije glac'har biqen .

Hoguen , ma ém guelfec'h brêman  
 Ebars em daëlou beuset ,  
 Choui lavarfe : ne qet emân  
 Hor boanup-ni anaveset ;  
 Ennes a voa gyè a galou ;  
 Emân a so contristet ,  
 Ennes a voa un den mignon ,  
 Hac emân sur n'en deo qet .

Allas ! eo sur , va mignonet ,  
 Me so ar memes ini ,  
 Mes biscoas' ne gavis sujet  
 Voe capabl d'am glac'hari ;  
 Ibreman me mens cavet unan  
 Hac a c'hlaç'hari va c'halon !  
 Ha pa po clévet ancan ,  
 Ec'h estonfot gant réson .

Pa voan me ebars em jardin  
 O contempli va fleuriou ,  
 Va c'halon , exant a chagrin ,  
 Va daoulagad a saëlon ,  
 Ha me clévet un alc'hoëder  
 A us va fen o cana :  
 Ad studium te confer (1) ,  
 Nam nupta est amica .

Ha me o vonet d'am godei ,  
 O tenna va fistolen ,  
 Hac ho tiscar an alc'hoëder  
 D'an traon demeus ar yesen .  
 Ra gollo velse o bue  
 Qement en deo ar galon  
 Da sonet da ammonç din-me  
 Ar sort desolation .

Mes p'e glêvit-n qement-mân  
 A c'hinou eur messager ,  
 Otramant , clévet anean  
 Eus a veg un alc'hoëder ,  
 Oblijet ou bet d'e glêvet  
 Ebars em brassa glac'hari ,  
 Ha setu ase ar sujet  
 Ma tesiran an douar .

Neus mui a gonsolation  
 Evidon bars er bed-mâ ,  
 Neus nemet desolation ,  
 Tourmanchou ar re vrassa

A ve reservet evidon  
 Goudre bea re garet ,  
 Mes me vo furroc'h da vijen  
 Ha ne garin den ebet .

P'am eus fraillet ar chadennou  
 Gant pere oan amaret ,  
 Pa meus brusunet al lassou  
 Gant pere voan liamet ;  
 Pa è demeset va mestres ,  
 Me guemero an habit ,  
 Ha me ne vesân recoles ,  
 Certen me a vo hermit .

Mes gouscoade , p'en em sonjân  
 Ha pa rân reflexion ;  
 Ur recoles a ranq goela  
 Ha derc'hel trist e galon ;  
 Un hermit beva retirt  
 Hac ep nep plijadures ,  
 Qement-se oll so re galet :  
 Ret è din c'hoas eur vestres .

Mes pelec'b caouteur guir vestres ?  
 Ar bed-mân a so malin ,  
 N'am eus qet esom danseres ,  
 Nac unan a garo guin ;  
 Diaroq me vos difficil ,  
 Mes bremàn pa on trumpet  
 Me a vesò muioç'h subtil  
 Pa conversin gant merc'het .

Mes anaquot rân eur fumelen  
 So dign a attantion ,  
 Onnes a vo da virigen  
 Rouanes eus va c'halon ;  
 En onnes e mân va fianç ,  
 Onnes è va c'harante ,  
 Enni e mân va esperanç ;  
 Hí è sourcen va hue .

Evelse un den glac'haret ,  
 Evit en em gonsoli  
 A dle alies lavaret  
 Da bassecal e annui :  
 Mar deo serret an nor-se ,  
 Unan al a sigoro ,  
 Me a vo bepret er sonj-se ,  
 Hac a vo betec ar maro .

Ma tesirfac'h , va mignonet  
 Gout hano ar c'homposer  
 Guinidic è a Locquic ,  
 Map ena d'eur guiaider ,  
 A so n'em lajet er studi  
 Bars er guë a Vontroules ,  
 Hac a so bremàn disouci ,  
 P'è demeset e vestres .

Evit soulaji ar c'haner ,  
 M'o supli , assistantet ,  
 Da rei desan pep a siner  
 Evit eva d'ho yec'het ,  
 Otramant , prenit ar chanson ,  
 Pini he deus ar pouar  
 Da rejouissa ar galon  
 A greis ma ve en glac'hari .

(1) Da lavaret è , en em ro d'ar studi , da vestres so demeset .